

AR PAOUR KEAZ LAZAR

Great gand eunn den nevez-zistro oud ar bed-all

War don : Maoud ar Goff ha maoud ar Gall

War ma fe ! ma mignoned ,
'Divalo oun bet gwasket .
Sonjal a rean , e taol ma ,
E renchenn lipad ma loa .

Ann Ankou , ann dougnez kri,
Evit ma stleja , gant-hi,
E bro teval ar goet ,
Kalz , kalz , he deuz c'hoariet.

Na velken , ouz he skilfou ,
M'euz chaset ma relegou ;
Med , pell , a vo kizellet ,
War-n-oun he fao milliget .

Ma diou jod a zo melen
Evel eur c'hoz anduilhen ,
Ma lagad hanter-varo ,
Treur oun vel eur zac'h tacho .

Ma chouk a zo daoubleget ,
Ma fri n'euz eunn troatad hed ,
Teuzet krag eo ma c'hof-kar ,
Ha krena ra ma diou-c'har .

Evel eur paour mac'hagnet ,
War eunn tammik baz harpet ,
Er parkou , en em stlejann
Vel ar c'hisier da heoliann .

Red ec'h eo din , krenn,kuitaad
Kement seurt a gavenn mad ,
Hag eunn dra wasoc'h,- ouc'h-penn,
Karoud pezh e gasaenn .

Karoud a rean ar bevin ,
Eunn tamm maout , eur c'har bonsin,
Bremen renkann , vel eur c'hez,
Lounka iod ha patatez .

Gand eur banac'hiñ gwinn mad
E verve , gwech-all,ma gwad ,
Bremen z'ann,p'am euz sec'het,
Da eva gand ar pesket .

Ma c'hourn , gant he vogeñen ,
Am lake zard ha laouen ,
Keno! ma ialc'h varellet,
Ma c'hourn ker brao bragezet !

A greiz kalon e karien
Ar biniou, ann abaden ,
Med ar wech man , heb bombard,
Em euz renket lammout start !

Me gare , d'ann daou hamm ru ,
Nijal gant ma c'hazeg du ;
Bremen , vel eur velc'houeden ,
E kuzann barz ma c'hrogen .

Karoud a rean , mintin mad ,
Er mezou , redeg ar c'had ,
Bremen ne rann ken chase
Nemed da c'hoen ma gwele !

Da Ervoan-M. Ann Andouar ,
E Gwerliskin .